

IAN BUNYAN

Ian Bunyan, an hini hen deuz groet al levr ma, a oe ganet euz eur famil baour, er bloaz 1628. Aboanen doa dek vloaz, ma oe trubuliet o sonjal er poaniou a zo lekeat a du evit ar re na zentont ket euz Doue. Iaouankiz an den ma koulskoude a oa bet avelek meurbed ; mes Doue n'hen dilezas ket, ha d'an oad a seiz vloaz var-n-ugent, en em roaz holl da Jesus-Christ. Pemp pe c'houec'h vloaz goude he zistroidigez euz Doue, Ian en em lekeaz da brezegi an Aviel. Neuze er bloaz 1660 e oe taolet er prizoun. Tennet er meaz gant eun Eskop, e oe taolet a nevez eharz c'houec'h vloaz goude. Oveza lakeat ar Jolier da zistrei euz Doue, e oe anevet losket er meaz. Tapet adarez e oe siket an veren toul abalamour da c'hir Doue. Enpad an amze-riou-ze ma oa bet er prizoun eo e reaz al levr ma. Doue a zeuz d'he gemer an 12 a vis eost 1688. He gorf a oe douaret en Londrez, el lec'h ma c'hortoz adsavedigez ar re varo en hano Jesus.

BEACH AR C'HRISTEN

WAR-ZU AN EURUSTED PEUR-BADUZ

PENNAD I

DISTRO AR C'HRISTEN — EAZET HA PENNEK

Evel ma veajen dre hent distro ar hed-ma, ec'h aruiz en eul leac'h, en pehini e oa eur c'havargn. En em c'hourve a riz evit kemer eun nebeut ehan, hag o veza manet kousket, e weliz en eun huvre, eun den gwisket gant *dillad lous* ha freuzet. ¹ En he za e oa, o trei he gein d'he di he-unan. Eul levr hen doa en he zorn, hag e oa sammet gant eur beac'h pouner. Gwelet a riz goude. penaoz e tigoraz al levr, hag e lennaz ennan. ² Eun nebeut goude, en em lakaz da wela, ha da grena, en hevelep doare, o veza holl spouronet, e kriaz gant eur vouez trist ha truezuz : « *Petra a zo ret d'in da ober.* ³ »

Er stad-ze e fistroaz d'ar gear ; hag en em dalc'haz, keit hag e oe possubl dezhan, dirag he vreg hag he vugale, gant aoun na weljent he c'hlac'har. Mes evel ma kreske he dristidigez euz a vui en mui, ne hellaz ken en em dere'hel ; evel-se e tiskleriaz dezhei ar pezh hen doa var he galoun, hag e lavaraz dezhei : « Va greg kez, ha c'hwi, « va bugale ger, pegen reuzeudik ez oun ha pegement a « druez a zo ezom da gaout ouzin ! Kollet ez oun, hag « ar beac'h pouner pehini am skwiz ⁴ eo an dra a zo « kiriek d'am c'hollidigez. Beza em euz ouc'h-penn eun « ali sur hag a ro d'in da anaout, penaoz ar gear ma, en « pehini e choumomp, a vezo devet gant tan an env ⁵ : ha « penaoz an cil hag egile, me ha c'hwi, va greg kez, ha

1. Zak. iii. 3 2. Luk. xvi. 29 3. Ak. ii. 37 4. Zek. xxxviii. 5 5. 2 Pér. iii. 7